

## **Chanson Paotred Plouillo**

*Modernnaet eo bet an doare-skriva. Geriou galleg a zo aliez.*

*(War ton : Adieu, Pontreo)*

M'am-bije spered da gompren, evel am-eus fantazi,  
Me a vije 'n em implijet da zoned da gompozi  
Eur himiad leun euz a hlahar, greet da goñskrived  
yaouank,  
O-deus tennet ar billed du e-barz ar bloavez prezant.  
E-barz ar bloaz mil eiz kant c'hweh, ar bemp a viz  
Gwengolo,  
Ez eo degouezet adarre euz a barroz Plouillo.  
Tud yaouank evid an arme, tud euz ar re derrupla ;  
Glaharet eo o oll ligne', p'o gwelont o partia.

Da bartia gand an actif n'ez eus ken nemed pevar :  
Erwanig Jakob, euz ar bourk, ha Guiljam ar Meleda,  
Ha Yannig Prad euz ar Goajou ha Pipi an Aveant :  
Pevar den euz ar re vrava, korvou kaer ha tud vaillant.

Erwanig Jakob a lavare en deiz-se d'e gamarad :  
« Hemañ a zo eun devez trist hag a ra din kalonad !  
Gweled va mamm baour o ouela, ha va zad kêz dezolet !  
Va halonig e-barz em hreiz 'zo dija kazi rannet.

Kalz a zoñjfe de', marteze, penaoz e ven eur poltron,  
Em-be aon rag eun tenn fuzuill pe rag eur vouled kanon,  
Peotramant aon rag ar fatig o vale dre an hentchou,  
Pe gousked war eur gwele kan<sup>1</sup> e-barz er hordegardou.

---

<sup>1</sup>kan / ?

Dougen va dillad war va choug, va fuzill ha va zabrenn.

Bale bemdez a gêr da gêr dre ar fank hag ar vouillenn ;  
Ha goude, e fin va beaj, rankoud marteze kampi,  
Pe kousked war an douar yen, peotramant bioaki.

Tor o-deus an neb a zoñj se : ma halljent lenn em halon

Evid gweled va bolonte' ha va inclination :  
Ma ne faotfet nemed va gwad, me hen skuillfe toud joauz

Evid soten on Impalaer, eun tad ker karantezuz !

Piou ne gombatfe ket hardi gand eun Impalaer kristen !  
Eur gaoz ker just hag e hini a zo fasil da zouten,  
Pa'z om membrou da Jezuz-Krist, soudarded an Aviel,  
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Spered-Santel,  
Arsa eta, kamaraded, kent kuitaad euz or hontre,  
Dem-ni da iliz Plouillo da suplia on Doue  
D'or prezervi demeuz ar gwall chañs pa vezim en armeou

Ha da goñsoli 'barz er gêr on tadou hag or mammou,  
Adieu deoh, Aotrou Sant Millio, patron euz ar barrez-  
ma' ;

Adieu, kerent ha mignoned, sesit bremañ da ouela :  
Pedit Doue hag ar Werhez da gaved soagn ahanom,  
Hag on Êl mad d'or hunduo partoud e leh ma'z efom.

Adieu, va mab, va esperañs, eme an tad dezolet ;  
Piou a goñsolo da dud paour goude ma vi partiet ?  
Pa vin akablet gand kozni, me 'vo klevet o lared :  
Ma vije va mab kêz er gêr, en-dije va zoulajet.

Klevit ar vamm o kimiadi ivez digand he bugel :

Deut ama' c'hoaz ma ambrasi eur wech kent eged  
mervel ;

A-benn ma retorni d'ar gêr, me 'vo eet euz ar bed-ma'.  
Deus amañ etre va divreh evid ar wech diweza.

A gichenn ar momant fatal ma'h eus tennet d'ar billed,  
Bemnoz 'vel ma vo din kousked, me a zeblant da weled  
O tond euz eur gombat sanglant, war ar chariot bleaset ;  
Pe taoley en eun ospital, gand an oll abañdonet.

Ar soudard yaouank koñtristet, c'hoaz kent eged partia  
Evid êsaad o hoñsoli, a lavar, en eur ouela :

« Tavit, va zad ha vamm baour, ha bevit en esperañs :  
Doue, tad a vizerikord, a zo braz e Brovidañs. »

Goude ma oa fin d'ar brezel ha goneed ar viktoar,  
Gand gras Doue hag ar Werhez e vezo fin d'ho klahar.  
Evid merk euz or vaillantiz gand lore deuz on tokou,  
Ni zistroio prest d'ar gêr evid sehi ho taelou.

Adieu da barroz Plouillo, ha d'e oll habitanted,  
Adieu d'on oll anaoudegez, ha kerent, ha mignoned :  
Ha ma n'em ket ar boneurer bed-mañ d'en em weled,  
Gras deom e-barz er Baradoz asamblez d'en em gaved.